

# Kontadennoù Canterbury Pezh-c'hoari nevez Madarjeu

**Goude bezañ kinniget Alanig al Louarn ha Distro emañ strollad Madarjeu gant ur pezh-c'hoari nevez : Kontadennoù Canterbury. Emgav gant Yann-Edern Jourdan.**

Diskouezet e oa bet *Kontadennoù Canterbury* ganeoc'h war al leurenn e dibenn miz C'hwevrer. Penaos ho peus bet mennozh ar pezh-c'hoari ?


Bláithín Conneely-Allain, komedianez, barzhez ha skrivagnerez, he doa kinniget danvez ar pezh-c'hoari deomp. Eus lwerzhon eo Bláithín. E gouezeleg e oa bet desavet. Gouzout a oar saozneg evel-just, brezhoneg ivez pa oa bet o teskiñ un toullad bloavezhioù zo rak e Breizh emañ-hi o chom. Arbennigourez war an hensaozneg eo ha troet ouzh oberenn veur Geoffrey Chaucer.

## Piv e oa Geoffrey Chaucer ?

Ur skrivagner hag ur barzh e oa. E Londrez e oa bet ganet, e 1340. Marc'hadour gwin e oa e dad. Dre-se en dije bet tro Chaucer da zaremprediñ meur a zen ha da glevet meur a yezh, meur a zoare da gaozeal saozneg. Alese en dije lakaet en e soñj kinnig en e skridoù un doare saozneg a-ziwar meur a saozneg en ur c'hoari gant ar gerioù, gant an ton anezho. Ur sapre buhez en doa bet an den-se. Brezelour e oa bet ha meur a vicher e oa bet : kontroller maltouterezh porzh Londrez, kloareg al labourioù roial, eil gwardkoad... Marvet e oa e 1400. Ar skrivagner kentañ an hini eo bet douaret er *Poets' Corner*, "Korn ar Varzhed", en abati Westminster.

## Perak lakaat war al leurenn un istor a c'hoarvez er 14<sup>vet</sup> kantved ? Un heklek zo er gevredigezh vremañ ?

E gwirionez ne c'hoarvez ket istor ar pezh-c'hoari er 14<sup>vet</sup> kantved met hiziv an deiz. C'hwec'h kant triwec'h vloaz zo e oa bet kavet sekred ar vuhez peurbadel gant tri alkimiour. Bolennad ar braoued 'oa bet peuzlonket gant ur c'hi ha gant an tri abostol-se. Un dakennig o doa dalc'het evit o mignon Geoffrey Chaucer ha roet anezhi dezhañ da evañ. Ar pezh zo, ne chome ket trawalc'h evit delc'her Chaucer ez-vev. Setu n'eo ket bev ken met n'eo ket



Evit gwelet an abadenn, mont e darempred gant strollad Madarjeu evit programmiñ ar pezh-c'hoari : [madarjeu.bzh@gmail.com](mailto:madarjeu.bzh@gmail.com)



© Madarjeu

Pezh-c'hoari nevez strollad Madarjeu.

marv kennebeut. Dihuniñ anezhañ da vat a glaskont ober neuze. Penaos ober ? C'hoari lod eus e *Gontadennoù Canterbury* ! Amañ kontadenn ar Pardoner hag hini ltron a v-Bath. Danvez a vremañ zo er c'hontadennoù-se : ar garantez evit an arc'hant, stourm benelour ur vaouez bet skoet ha gwallgaset gant he gwazed...

## Penaos ho peus labouret evit prientiñ ar pezh-c'hoari ? Petra a vez gwelet war al leurenn ? Divyezhek e vo an abadenn, peseurt plas a vez roet da bep yezh ?

Da gentañ hon doa bet labouret kalz war ar skrid. Lenn, adlenn, lavaret, kompren, treiñ diwar ar saozneg hag an hensaozneg, kavout ar gerioù, c'hoari ganto, gant ar son anezho, reiñ ur yezh vrav da glevet ha da vezañ diskouezet dre ar c'hoari. Goude-se e oa bet savet ar pezh-c'hoari bet leurennet a-stroll. Pelloc'h e felle deomp mont koulskoude. Goulennet hon doa neuze digant Nigel Hollidge dont d'hor sikour evit peurlourenniñ. E Bro-Saoz e oa bet ganet Nigel hag e Breizh emañ o chom.. Komedian ha leurenner eo. Barrek-meurbet eo war labour ha buhez William Shakespeare.

Ar c'hinkladurioù zo bet savet ganeomp

asambles gant sikour Marguerite Danguy des Déserts, kinklourez a vicher. A bep seurt 'vezo gwelet war al leurenn : an div gontadenn evel-just hag un tamm eus buhez an alkimiourien a glask dihuniñ brasañ barzh Bro-Saoz. Sonerezh 'vezo klevet, kanaouennoù ivez ha meur a dra liammet ouzh hor buhez a Vretoned e Breizh. Dre-vras eo hanter-vrezhoneg hanter-saozneg ar pezh-c'hoari. Klasket hon eus liammañ an div yezh evit ma 'vefe anat tremen eus unan d'eben. N'ez eus ket ezhomm da gompren brezhoneg na saozneg evit intent ar pezh-c'hoari. Dont, azezañ, en em leusker da vont ha dao !

## Pegoulz e vo gwelet an abadenn ?

D'ar Yaou 28 a viz C'hwevrer e oa bet c'hoariet e Ploueskad. Maread a dud a oa deuet da welet an arvest. Distroioù mat hon eus bet, pa vefe gant skolajidi Diwan Gwiseni pe gant tud all. Diwezhatoc'h e vezo tu d'an dud da vont d'hor gwelet e Rodez en Aveyron, d'an 19 a viz Gouhere 2019, e-kerzh Festival an Estivada. Evit bremañ, n'hon eus deiziad all ebet e Breizh, siwazh, un diouer a arc'hant pe a youl kredapl.

**Komzoù dastumet gant Valérie Kervella**